

**Perrot** (Plouarzel 1877 – Skrignag, 1943).

**Buhez ar Zent**, bet embannet e 1911.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

War “Embann an Hirwaz“ ne vo nemed sent Vreiz.

### **Sant Jildaz**

**(Abad – 493 – 570)**

*C’hwehved devez a viz C’hwevrer.*

Jildaz a hanas e Arcluyd, er bloaz 493, hag a oa mab da Gaunus, roue Bretoned ar Strad-Cluyd. E dad a oa kristen, hag a gasas anezañ ez-yaouank da Vro-Geumri, d’ar skol gand Sant Ildud.

Pevar, euz ar re a reas anaoudegez ganto eno, a deuas da veza eskibien diwezatoh, Divi, Leonor, Paol ha Samson.

E Lanildud, Jildaz a zeskas kared ar relijion, ha kared ar studi. E youl a oa deski, ha ranna e zeskadurez en-dro dezañ. D’e bemzeg vloaz e kimiadas diouz e vestr karet hag e vignoned vad, hag ez eas da skoliou brasa Bro-Hall, ha goude beza dastumet evel eur wenanenn eveziant, ar peb gwella, diwar ar bleuniou digor dirazañ er skoliou-ze, e tizroas da horren e kest an Iliz, ar pezh en-devoa kuntuillet, beteg ma kavas tro d’her ranna etre ar bobl, gand komzou an aviel. Beleget e oe d’e bemp bloaz warn-ugent. En e brezegennou leun a dan, e reas neuze eur brezel digernezh d’an oll ziou fall a wele en-dro dezañ, kag e lakae zoken ar rouaned da greñ.

Er Strad-Cluyd, kristenet gand sant Finnian, ‘oa bet greet droug d’ar relijion gand dispaherezh ar Zaozon digristen. Jildaz a zavas a-nevez ar pezh a oa dismantret, hag a hounezas zoken e-leiz a baianed da Jezuz-Krist. War galv Santez Berhed, e treuzas ar mor da vond d’an Iwerzon. Eno ivez, abaoe m’oa maro sant Patris, ar relijion a yee fall an traou ganti. Jildaz, kenta tra a reas, a oe sevel eur skol-veur e Armagh, hag ahano e ziskibien a yeas dre ar vro, hag a lakaas ar gelennadurez kristen da vleunia, ha da zougen frouez evid ar baradoz.

War-dro ar bloaz 530, e tizroas da Vreiz-Veur, hag eno neuze eo e skrivas al lodenn genta euz e levr brudet “*De excidio Britanniae* : Dismantr Breiz“. Anez al levr-se, eur hantved penna-da-benn euz buhez or gouenn, ar pemped, ne vije bet deuet netra ebed warnezañ beteg ennom, kemend-all a zarvoudou braz ha skrijuz a hoarvezas en e zoug.

Goude beza savet ar skrid-se, Jildaz en em denna en enezenn Echni, da ouela d’e behejou e-unan, ha da re tud e ouenn, pennabeg, emezañ, euz ar reuziou a goueze a-vil-vern war ar vro. Sevel a reas eno eun ti-bedi en enor d’an Dreinded, gand eur peniti en e gichenn. Beva ‘ree gand ar pesked a dape er mor, ha gand ar viou a gave e neziou al laboused, war drêz an tevenn pe e fraillou an torraod.

Eun devez, eun toullad laeron-vor, Saozon da gredi eo, a blavas war e enezenn hag a lakaas an tan en e lochenn. Jildaz a gemeras neuze ar henta bag hag a gavas, hag a ziskennas ganti en enez Houad, e Bro-Wened. Ar brud anezañ en em skignas buan tro-ha-tro, ha Gwenediz a deue d’e gaoud, da houlenn digantañ rei dezo an dorn da groui eur Vreiz nevez, war dismantrou an Arvor.

Ar relijion eo mên-diazez ar broiou ; Jildaz a ouie ervad ne vije sanket e kalonou ar Vretoned nemed manatiou a vije savet en o zouez, da lakaad ar sklêrijenn da bara war ar sperejou.

E Bro-Leon, edo manati Kastell hag hini Baz.

E Bro-Gerne, hini Landevenneg hag hini Loktudi.

E Bro-Dreger, hini Landreger.

En Domnone, hini Sant-Brieg ?

E Bro-Wened hepken, ne oa netra c'hoaz.

Jildaz, kenta tra a reas, a oe sevel eur manati e gourenezenn Rhuis, hag ar skol a grouas ennañ a oe barr-leun a vugale e berr-amzer.

Pa welas e helle e abati nevez mond en-dro heptañ, eh en em dennas en eur peniti distro, e koajou Kastenneg : eno e skrivas an eil kevrenn euz e levr *De excidio Britanniaë*, hag enni e sko dizamant war ar pehejou a lakae Breiz-Veur, e vamm-vro garet, da goueza en he foull : re ar bobl, re ar veleien ha re ar pennoù kurunet.

Goude ar skrid-se, Jildaz a zavas e Bro-Gerne meur a leandi war skwer hini Rhuis ; e Laniskad, e Karnoed hag beteg e Pennmarh hag e Beg-ar-Raz e chom c'hoaz en on amzer, ar roudou anezañ.

Mar deo sant Paol, sant Tugdual ha sant Brieg ebestel Vreiz-Izel e tu an hanternoz, Jildaz eo heh abostol e tu ar hreisteiz.

Mervel a eure, en enez Houad, d'an 20 a viz Genver 570.